

Keleier Sevenadurel Ar Vro

N°2 miz Meurzh 1991 • Digoust •

ACTUALITES CULTURELLES DE BRETAGNE/ KELEIER SEVENADUREL AR VRO
Kelaouenn embannet bep daou viz gant Skol-Uhel ar Vro/Institut Culturel de Bretagne
13, straed Belfort, BP 66 A, 35031 Roazhon cedex, Pg. 99 38 98 88 Faks: 99 38 50 32
Kadoriad: Pierre Le Treut, / Renier ar gelaouenn: Bernard Le Nail, Sekretour ar gelaouenn: Philippe Lanoe.
Koumanant: 80 lur evit ar bloaz (6 niverenn), ISSN 0985 1062. 1000 skouerenn.

Kelaouenn embannet bep daou viz gant Skol-Uhel ar Vro

BERR-HA-BERR

G O U E L I O Û

> Trede Gouel Etrebroadel al Levrioù Troioù-kaer ha Beajiñ "Étonnants voyageurs" a vo dalc'het d'an 8-18 a viz Mae a zeu, e Sant-Maloù. Evit lidañ dizoloidigezh Amerika ez eus bet graet eus an Inizi Karaib danvez pennañ ar gouel.

Titour: Pennsekretourva, 4 bis, straed la Motte Picquet, 35000 Roazhon, pg. 99 65 55 53.

> D'ar 25 ha 26 a viz Ebrel azeu e vo dalc'het pempvet "Nevez-amzer ar C'hevredadoù" e Kemper.

Titour: Ti ar c'hevredadoù, hent-dall an Oded, 29000 Kemper, pg. 98 90 39 51.

B E A J O Û

> Kelc'h keltiek Roazhon, ar youl donaat anaoudegezh ar bed keltiek gantañ hag evit lidañ e 60vet deiz-ha-bloaz, en deus prientet ur veaj da lwerzhon digoret d'an holl. War ar roll: treizhañ eus Rosko dag Korkig, gweladenniñ Kell Arne, Ledenez an Dangan, kontelezh Kirri, Glengarif, Limnac'h, Galliv, ar C'honamara, kejañ gant strolladoù iwerzhonat, nozvezhioù er "pub". Priz: 4050 lur. (+Fenrolladur d'ar C'helc'h) evit dek devezh.

Titour: pg. 99 63 26 69 pe skrivañ: Kelc'h keltiek, J.P. Vincent, 28 straed ar Gantelles, 35700 Roazhon.

> Ar c'hevredad Breizh/lwerzhon a zo o prientiñ ur veaj penezek devezh da lwerzhon en nevez-amzer.

Loc'het e vo eus Rosko d'ar gwener 15 a viz Mae (erru e Korkig d'ar 16 tro-dro 13e), distro eus Korkig d'ar sadorn 30 a viz Mae (erru e Rosko d'an 31 tro-dro 7e 30).

An enskrivadurioù a zo da gas an abretañ ar gwellañ da Breizh/lwerzhon - Polig Manjarret, lann-Langroez, 56270 Plañvour, pg. 97 86 33 73.

Ar gouren hag ar c'hoarioù henvoazel

PENNAD-KAOZ GANT GUY JAOUEN



Guy Jaouen, 37 vloaz, teknikour EDF ha gourener. Dimezet ha daou vugel dezhañ e ouest e amzer vak d'ar sport a blij ar muiañ dezhañ. Bez' ez eo sekretour an darempredoù etrebroadel evit Kevread ar Gouren ha sekretour kevread etrebroadel ar Gourenoù Keltiek. Ezel eus S.U.a.V. adalek ar hloavezhioù kentañ ez eo ivez sekretour ar gevrenn Sportoù ha C'hoarioù.

Guy Jaouen, setu o tont en-dro ar c'houlz ma adkaver ar c'hoarioù hengounel hag ar gouren e kalz a ouelioù...

Gwir eo. Dibenn an nevez-amzer hag an hañv a zo bet a-viskoazh marteoù gouel o kemmeskañ stummoù disheñvel sevenadur kevredigezh Breizh. Ar gouren hag ar c'hoarioù hengounel zo en o zouez.

Gwechall, ha n'eus ket pell zo c'hoazh, ar gouren hag ar sportoù gourenel a roe tro d'en em ziskouez en e wellañ dirak un danvez-patron seheset gant ho nerzh, dirak ur strollad harperien pe...ur galonig da e'houit.

BERR-HA-BERR
PREZEGENNOU

> Kreizenn sevenadurel Maner Kernaod - Mellag 29 (adrigidi-gezh d'an 11 e viz Ebrel) 30 a viz Mae, prezegenñ gant Gael Milin, mestri-prezegenner e Skol-Veur Breizh-Izel: "Ar marc'h, arouez ar roue".

DISKOUZADEGOÙ

> Eus ar 1añ d'an 10 a viz Mae, Kreizenn sevenadurel Maner Kernaod (Mellag, 29) a ginnig un diskouzaedeg diwar-benn "Livourien a vremañ oweñt gant an davezh mojenel". Evit gouzout hiroc'h: Maner Kernaod, pg. 98 71 90 60.

> Betez ar 26 a viz Ebrel 1992 ez eus tu da weldañ e Mirdi Dobreie an diskouzaedeg: "Peur-ehoadur livourien Naoned d'an XIXvet kantved: tresadennoù isovouriezh". Titour: Mirdi Dobreie, pg. 40 69 76 08.

> Betez an 31 a viz Meurzh e kastell Keryann (Sant-Nouga, 29) e vo tu da welet un diskouzaedeg e koun Pierre Péron. Gannet e Brest e 1905, leonad a orin, en doa darampredet skolzou-Kaer Naoned. Goude e varv, e 1988, en deus lezet un oberenn a-bouez: ouzhpenn 6500 laodenn, engravadur, skitell, an holl gant litour. Titour: pg. 98 69 93 69.

KENDIVIZOÙ

> Eus an 2 d'ar 4 a viz Ebrel - Guingamp hag ar vuhez kefredel e Frois war-dro 1800 - Studiodenn a-zivout red-micher ul lenneg gannet e Roazhon (1748-1816) hag en deus bet ul levezon bras meurbit, dizezet war uhelvenn ad laikezh republikan, war buhez speredel, politikel, sonerezhel e amzer.


Lec'h: Palez Sant-Melen, Roazhon
Titour: Edouard Guillon, Skol-Veur Breizh-Uhel - Roazhon II, 6, ball Gaston Berger, 35043 Roazhon cedex, pg. 99 59 32 54.

> D'ar 5, 6 ha 7 a viz Mae - "War toudoù Kolomba: Europa ar C'hornog ha dizolidigezh ar Bed Nevez, 1450 - 1650" Ar c'hendiviz-mañ ma kemero perzh ennañ un daougenñ istrouer bennek deuet eus broioù ar "Wareg allante" a zo e bal, da zeizha-bloaz beaj Kolomb, kostaat labourioù klaskerien meur a vro evit advuziañ levezon dizolidigezh ar Bed Nevez war talbenn atantel gwadern Europa.

Titour: Jean-Pierre Sanchez, Skol-Veur Breizh-Uhel - Roazhon II, 6, ball Gaston Berger, 35043 Roazhon, pg. 99 33 52 52 p. 10 43.

Ar gouren hag ar c'hoarioù henvoazel

PENNAD-KAOZ GANT GUY JAOUEN



Spont uhelrenk ar c'hoarioù hengounel-mañ e oa ar gouren marteze ?

Day eo anavezet e oa bet e-pad pell ar gouren c'hoari pennañ an holl gouelioù-mañ. Displegañ e c'heller an dra-mañ marteze gant ar fed e oa bet roet lañs d'ar sport gourel-mañ gant an aotrounez, gwechall, dre ma pourchase dezho, p'o devese ezhomm, soudarded ya'e-ha gourdoun-mat.

Adalek ar XIVvet kantved eo testeniekaet ar gouren met sur e c'heller bezañ emañ orin pennañ ar c'hoari-mañ, arz emgann deuet da vezañ sport, er gourennoù damheñvel a adkaver en inizi Breizh-Veur hag a zo, int, testeniekaet adalek ar Grennamzer uhel.

War e ziskar e schlante bezañ ar sport-mañ en XIXvet kantved. Goustad ez eo net war wellat e stad. Penaos emañ kont hiziv ?

En XIXvet kantved hag e deroù an XXvet e oa net war ziskar, gwir eo, ar gouren, evel kement tra dibar da Vreizh. Efedoù fall ur politikerezh kreizenn-mañ a c'heller gwelst aze, evel re ar brezel 14.

E 1930 e vo savet ar FALSAB (Kevred Mignoned Gourennoù ha sportoù Gourenel Breizh) deuet diwarnañ Kevread ar Gouren, a-drugarez da startijenn an Doktor Kotomng hag e skipañ. Deuet int a-benn da nevezin frammoù ar sport ha da zisaezañ e reolennoù.

Un emsav damheñvel a oa bet e Danmark da zibenn an XIXvet kanved ha savet e oa bet ur c'hevredad embregerezh-korf e bed ar maecioù. Meur a c'houarnamant zo bet dilennet abaoe gant an emsav danat-mañ, 800 000 ezel o vont d'ober anezhañ hiziv.

Siwazh, e Breizh, ez eo bet diases an traoù evit ar gouren goude ar brezel. Ret eo bet gortoz ar bloavezhioù '70 evit ma teufe un dibun. Hiziv ar sport-mañ ne ra nemet krakveañ ha pa glaskemp lakaat an traoù da vont war-raok d'al live etrebroadel, ha pa vefe embannet levrioù ha filmoù war e zivout.

Ha kouskoude ez eo bet gouest Kevread ar Gouren da sevel ur fram-tud a youl-vat a vefe evit merañ 5 pe 6000 ezel. Perak eo ken diases neuze? Meur a abeg zo. Hor sport n'eo ket anavezet en-ofisiel gant ar velestradurezh. Stad hag heñvalidat anezh zo d'ar fed-mañ, e-keñver ar c'hant ispisial.

N'omp na tud "oc'h ober war-dro sevenadur" na tud "oc'h ober war-dro sport" pa fellfe deomp bezañ anavezet war an div dachenn-mañ.

Fae zo bet graet e-pad pell gant kalz dilennidi war ar sportourien hengounel.

Ha bezañ montour pe mailh war ar gouren ne

halfval ket degas kement a vrud ha bezañ gourdouner mell-droad pe montour pe mailh war ar judo.

Pesurt kevredoù a ra war-dro ar gouren e Breizh?

En deiz a hiziv ez eus daou gevred oc'h ober war-dro ar gouren. Unan anezho, Kevread ar Gouren zo o tont eus ar FALSAB. Egils, poellgor Breizh an FFL pe FAL-T-Sab ("T" zo evit ar ger galleg "traditionnel") zo ur c'hevredad, bet savet e 1982, evit sevel enep al lusk nevezin a oa bet da heñ savidigezh Kevread ar Gouren e 1980.

War a halfval ez eo net bet ar gouren betek broioù all eus Europa. Danos ha gouren Breizh eo a vez kavet du-hont pe d'ar gouren all gant reolennoù damheñvel ?

Lakaat gouren Breizh da vezañ etrebroadel a oa unan eus palioù Kevread ar Gouren. E 1982, e c'heller gwelst mont pelloc'h evit bezañ kreñvoc'h en hor broioù. Ha n'heller kreñvoc'h ez eus bet digoret kalz a zorioù, a-drugarez d'ar etrebroadel-mañ. Ni zo bet penn-kaoz da savidigezh, e 1985, Kevread Etrebroadel ar Gouren Gelliek (FILG). Bodet e vez emañ gouren Breizh, gouren Kerveveur, haekhold (Bro-Skos ha norzh Bro-Saoz) ha gimna (broioù norzhat) Daou bal hon eus: a-drugarez d'ar FILG hon eus lakaet degemer gouren Breizh e kornôg Europa. Ar c'hevredoù-mañ ne ginnigont gouren Breizh nemet d'ar c'houerierien a live uhel, evit ar c'hevredigoù etrebroadel.

A-hend-all hon eus klasket brudañ da vat gouren Breizh e lec'hioù resis evit sevel kluboù ha polli-gouren gouren evel e Bro-Friz pe en Iwerzhon, ha kement-mañ a-drugarez da vontourien o deus asantet mont da vezañ er broioù-hont.

Evit distreiñ da Vreizh, ha bez' e c'hellfec'h lavaret deomp pet ezel zo bremañ?

Evel just. War-dro 800 ezel zo er C'hevread Gouren ha 150 en hini all. Day eo lakaat ouzhpenn 200 pe 300 den n'int ket izili (obererzh er skolioù).

E-doug an 20 vloaz diwezhañ ez eus bet war-dro 13 000 den o c'houren da vare pe vare.

Hag ar c'hoarioù hengounel? Hag aet int war an diskar int-ivez e-pad ur pennad? Pe daoust hag ez eus bet atav tud evit c'hoari?

Mat eo ober ar c'hemm etre ar c'hoarioù gourenel hag ar c'hoarioù oueskded. Tud zo bet hepred, tost da vat, evit ar c'hoarioù gourenel hag a veze kavet er gouelioù, asambleg gant ar gouren. Kaoz a oa bet, pa oa bet savet ar FALSAB, d'u nevezin, hogen ret eo bet gortoz deroù ar bloavezhioù '70 evit dont a-benn d'e ober. Ur plas zo bet roet dezho atav er gouelioù a-ziv ar maez e Breizh-Izel avat. Ar c'hoarioù oueskded, aozet e lec'h pe lec'h, e oa nebeutoc'h a dud war o zro. E pep lec'h e oa anezho. Er vro vrezhonek e kaved ar re zibarant anezho avat. C'hoariet e vezent da geñver ur gouel, ur c'hoari karter, ur pennad-diskirzh etre anezheñ. En arvat ez int lakaet marteze gant ar c'hoari bouloù.

Pesurt c'hoarioù zo ar re vanaañ da welet d'ho sonj?

Sevel ar herc'henn hag ar gouren, hep mar na marteze. Ar vazhig-kamm, aet da get en XIXvet

kantved hag ar vellad, c'hoarioù skipañ ma'z eus, a blije kenañ da yoc'hadou tud ivez, moarvat.

Gouerener oc'h, c'hwit oc'h-unan?

Hag ez on, abaoe diskar-amzer 1968, 13 vloaz e oan da neuze. Ezel on bet eus kevredoù mell-droad, half-hall ha judo e-pad meur a vloaz ha da c'houde ez on bet gourdouner mell-droad ha montour judo ha darampredet 'm eus metoù ar sport a live uhel.

Perakh oc'h eus kroget gant ar gouren neuze?

Kroget 'm eus ur pennadig war-lerc'h va breur, hag en kadoriañ a-vremañ kevread ar Gouren. D'ar mare-se, ar pep brasañ eus ar gourenadegoù a veze graet e gouelioù hihan a-ziv ar maez. Boas e oan outo ha me genidik eus Berrien.

Ken troet oc'h gant ar gouren m'hoec'h eus kenlabouret evit sevel levrioù diwar-benn ar m'emaoc'h oc'h ober enklaskoù war an davezh-mañ hag a gas ac'hanoc'h betek Breizh-Veur.

Gwir eo, kenlabouret 'm eus gant un nebeud mignonnet, da sevel un nebeud levrioù diwar-benn ar gouren. Bet e oa o sevel rak ne oa levr ebet a-raok ha d'arjener en dije gallet bezañ kement-mañ evit dazont ar sport. Ouzhpenn-se, gant va c'harg a-vremañ a sekretour Kevread Etrebroadel ar Gourennoù Keltiek em eus bet tro, a-drugarez da eskemmioù gant va c'hensurterd estren, da anavezout gwelloc'h orin ar gouren ha c'hoant zo deuet din da sevel un dezm war an davezh-mañ.

Ha bez' e c'hellfec'h ober anv eus ar gouelioù pennañ da zont?

Setu un nebeut anezho: Sant-Maloù, d'an 12 a viz Ebrel: abadenn-veur ar c'hampionad dre skipañ-hoù kluboù.

Karaz, d'an 19 a viz Ebrel: gourenadeg etrebroadel ar gourennoù etrekeltiek.

Trigavou (e kichen Dinan), d'ar 24 a viz Mae: kampionad broadel hiniennel.

Gouennac'h (Penn-ar-Bed), d'an 2 a viz Eost: gouel ar c'houerierien.

Gwengamp, d'ar 16 a viz Eost: abadenn-veur ar c'hampionad broadel dre bouentioù hag evel just gourenadegoù gouelioù meur Kemper hag An Oriant.

Day ober anv ivez eus bodadeg veur broadel hag europat ar c'hoarioù hengounel (50 c'hoari, 600

perzhad) e Karaz da Lun Fask, d'an 20 a viz Ebrel hag eus gouel Moustier-Vili d'an 28 a viz Even.

Da glozañ, petra ar pefe c'hoant da lavaret?

Spil hon eus e vo anavezet ar gouren evel sport broadel, dizale, evel m'eo bet anavezet ar judo e Bro-Japan, an gouren "siru" e Korea, ar "glima" en Island, gouren Kanaria hag ar sportoù gouzelat en Iwerzhon. Kement-mañ hor sikourfe da saveteñ unan eus pinvidigezhioù hor glad sevenadurel.

KOMZOU DASTUMET GANT ANNAIG RENAUD

EVIT GOUZOUT PEP TRA DIWAR-BENN SPORTOÙ BREIZH.

"C'hoarioù Breizh" - Guide annuelle des principaux jeux traditionnels de Bretagne. Ed. Institut Culturel de Bretagne.

-LE JONCOUR Paul, JAOUEN Guy et Jean-Pierre. La lutte bretonne des origines à nos jours, 1984, 32 p., 25 F.

-JAOUEN Guy et BEON Henri - Gouren, Breton and Celtic wrestling, 1985, 80 p., 45 F.


-Collectif - Ar Gouren, la lutte bretonne, prises de base, 1985, 84 p., 45 F.

-FLOCH Marcel et PERU Fañch - C'hoarioù Breizh. Jeux traditionnels de Bretagne, 1987, 52 p., 50 F.

-BARREAU Jean-Jacques et JAOUEN Guy - Eclipses et renaissance des jeux populaires, 1991, 130 p., diviet.

Da zont er-maez "Ar Gouren", azasadur brezhonek "La lutte bretonne des origines à nos jours".

An holl levrioù-mañ embannet gant Skol-Uhel ar Vro a vez skignet el levrioù. Urzhiet war-eeun digant S.U.A.V. e c'hellont bezañ ivez.



BERR-HA-BERR

> Generalitat Catalunya ha Bodadeg Rannvroioù Europa - Strallad IV a aozo ur c'hendiviz diwar-benn "Ar Gwirioù Yezhel ha Sevenadurel e Rannvroioù Europa, d'an 23 - 25 a viz Ebrel e Casa de Cultura "Tomás de Lorenzana", Girona.

An enklavadurioù a zo da gas a-raok an 31 a viz Meurzh da Sta Rosa Ferer Department de Cultura, C. Cuitadans, 18 E-17071, Girona Catalunya.

GALLOEG

> D'an 11 ha 12 a viz Ebrel 1992, devezhioù-studi diwar-benn ar galleg a zo ar rakvedet e Liger-Allante.

An davezh "Ar Galleg, ur yezh da dreuzkas" a vo studiet dre zaou hent: Dastum ar yezh Kelenner skolioù.

Titour: Bretagne galloëse, 16, stroad Fenc'hoed, B.P. 251 8, 35025 Roazhon cedex.

SONEREZH

> Eus an 8 betek an 12 a viz Ebrel e kemero perzh, evel bep bloaz, an A.R.Co.D.A.M. (Kevred Rannvro evit Kenzuziañ diorroadur ar Sonerezh hag ar C'horollerezh e Breizh) e salons Muscorama e Pariz gant e stand "sonerezh ha koroù Breizh".

Er Palez Meur e vo dalc'het ar salons. Titouroù: A.R.Co.D.A.M., 11, stroad ar Priold, 35410 Kestellgiron, pg. 99 37 34 58.

> Eus ar 27 betek ar 31 a viz Mae e vo tu, evit ar pevare gwech, da seloañ c'hoarierien ginnellet babi deuet eus meur a vro den em vodet e Berrien ha Grouvel, e kalon bro ar c'hoarierien dreujenn-gaol. Stralladoù o tont eus Italia (29 Mae), bro Arvern (27), Madagaskar (28), Roumania (30), Maritig (29), Sweden (30)... hag eus Breizh (Quintet Clarinette 29) a vo. Klouzar d'ar Sul gant kenstrivadeg ar sonerien, fest-deiz, leurenn dige.

Titour: Kevredad Paolred an Dreujenn Gaol, Christian Duro, pg. 96 29 12 84. Ti an dege-mer, Karaz, pg. 98 93 04 42.

> D'an 1añ a viz Mae, e vo lidet gant Diaouled ar Menez ha Diffusion Breizh o 20vet deiz-habloaz e Spezed.

War roll ar meuzioù: sonadeg ar strollad Gwerz (enrolliet e vo ur bladenn-arc'hant) hag ur festnoz gant strolladoù meur ar bloavezhioù 70/90 (Kouerien Sant Yann, Dir ha Tan, Diaouled ar Menez, Sonerien Du...) hag ivez diskouzaedegoù, buhezskodur straedoù ha tavarnioù Spezed (fest-deiz, kanerien, sonerien...).

BERR-HA-BERR

> D'an 8 a viz Mae e vo kentaet evit gouzout an 20^{vet} Kan ar Bobl en Oriant. Ar re a vo bet trec'h e c'henstrivadegoù "dre vro" hag e c'henstrivadegoù dibab war-eeun en Oriant a gendrivo e-barzh pemp rumad (telenn, akordeoù diatonek, kanerezh, kanerezh henvoazel ha sonerezh). Ar pemp den dibabet a gendrivo adarre evit Priz Meur Kan ar Bobl (5000 £) diouzh an noz a-raok un abadenm sonerezh gant tud brudet. Titour : sekretourva, 2, stradaed Paul Bert, 56100 An Oriant, pg. 97 21 24 29.

> Gouel "En Arwan" a vo dalc'het evit ar pevare gwech, e Klegereg, eus ar 7 betek an 9 a viz Mae. Kinniget e vo : abadennoù sonerezh gant Gwerzh (7 Mae), Sharon Shannon (Iwerzhon) ha Barzok (8 Mae), ur sonadeg digoradon da gresietez gant Laurent Louin ha fest-noz bemnoz ; kenstrivadegoù koroll ha c'hoarioù d'ar Sadorn. Titour : pg. 97 38 01 65, faks 97 38 08 31.

> Brudañ ar pibroc'h (piobairec'h), doare sonerezh chomet tost dionav betek-hen, a zo pal ur c'hevredad nevez savet. Ar sonerezh hangounel-se, sivel a-raok evit lincioù bras Bro-Skotez, vez c'hoarieg gant un niver distaet a dud. Ar re a fell dezho kelennoù ar pibroc'h a c'hell mont e doremp gant ar c'hevredad e Ti Soaz, Magaerem, 29270 Kerlof, pg. 98 93 48 95.

G L A D

> Ar C'hevredad evit Gwerzhioù Glad Istorel Reulon (APPHR) en deus prietlet meur a zeezh-studi : d'ar 25 a viz Meurzh "an tñ", d'ar 1^{er} an a viz Ebrel "Bro Milou", d'ar 8 a viz Ebrel "ar meuevñ", d'ar 6 a viz Mae "Sant Welhez", d'ar 16 a viz Mae "devezh ar bagerezh". Titour : APHR, B.P. 175, 35605 Reulon cedex.

> Kevredad "Trégar Patrimoine... Mémoire vivante" a zo pavezet lokaat da zont er-maez niverenn gantañ ur gazetenn nevez gouzlet da glad Bro-Dreger. E miz Mezhven e levio er-maez an il niverenn. 1951 eo priz ar c'houmanont evit 1992 (Ier niverenn). Titour : Jacques Lintoff, "Trégar Patrimoine", stradaed an Tiker, 22140 Beard pe Michelle Le Brannec, 47 boli Bro-Loren, 22300 Lannoez, pg. 96 48 35 98.

K L E W E L E D

> An disentez kemeret gant gouarnamant Breizh-Veur da lokaat dezhañ an dilennadegoù bras d'an 9 a viz Ebrel ha deus

EXPOLANGUES : ul lec'h evit karout ha kompren gwelloc'h bed an amzer a-vremañ



An Aotrou Pierre Le Treut, Anna-Vari Chapalain, Lena Louarn, Pierre Le Goff (Breizh e Paris), Bernard Le Nail, Evyenne Millour (Radio-Bro)

Al lennerien na vijent ket denet hevlene da "EXPOLANGUES 92" etre an 12 hag ar 16 a viz C'hwevrer a c'hell kaout keuz. Hervez an holl, hiskoazh ne oa bet ken brav stand ar brezhoneg abaoe ma z'ous anezhañ er salonoù, ur stand aezet a-drugad da Skol-Uhel ar Vro (framm sevenadurel ofisiel evit rannbarzh "Breizh" hag al Liger-Atlantel).

Hag evit gwir ur bern traoù a oa da welet, abadennoù FR3 "Gladienn ar Vro", en o mesk ur penad-film dreist diwar-benn skolaj Diwan, labour tud "An Here" gant ur zhiataerezh hag o diaz-titouroù diwar-benn ar "Geriadur Brezhoneg", geriadur unyezhek An Here, labour servijioù muntel Kelouenn ha Bretagne S (Breizh e Paris), kartennoù a ziskoueze kresk ar skolioù divyezhek (Diwan, Deskadurezh publik ha prevez), skolioù nevez a implij publik an div yezh war ar panellou-hentañ pe e Park an Arvorig, kalz a levrioù-deskiñ pe lennegezh, holl gelaouennoù ar vro, folleñnoù-brudañ diwar-benn an holl gevredadoù pe aozadurioù a labour evit ar brezhoneg... an darn vrasañ eus an dud a rae war-dro ar stand a oa brezhonegerien deuet a-ratozh kaer eus Breizh (An Here, Kelouenn, Skol-Uhel ar Vro) pe o chom e Paris (Ti ar Brezhoneg, Ti ar Vretoned, Diwan-Paris, KBDP, Fédération des Bretons de Paris...), ur wech ouzhañ oa leun a dud ha leun a vuhaz. Evit brezhonegerien deuet eus Brest pe Roazhon e oa ivez souezhus-tre en em gavout gant kement a dud gouest da gomz brezhoneg e-touez gweladennerien Expolangues. Plijus e oa ouzhpenn kejañ ouzhi Iwerzhoniz, Kosuziz, Kembreiz, ken dedennet ma oa an holl gant hon stand. Gwellet het desket ganti ar c'hernevez, yezh kar d'ar brezhoneg, hag a vez enoret muioc'h mui petra bennak ma n'eo ket ur yezh vev da vat ken.

Miliadoù a bapereñnoù bruderezh diwar-benn ar brezhoneg hag ar c'hevredadoù a labour evit kas war-raok hor yezh a zo bet roet e-pad pemp devezh. Un hanter muioc'h a levrioù, geriadurioù, kelaouennoù, spilhennoù a zo bet gwerzhet eget e 1991. Stajoù ouzhpenn war ar brezhoneg a vo aezet evit ar wela-dennieren niverus o deus roet a anv.

E-touez traoù all diskouezet er stand, eo bet sebet er wela-dennieren gant an arrouden gant ar yezhonour Claude Hagege brudet er bed a-bezh hag a dud bras gant kelennadurezh abred ar brezhoneg. An Aotrou Hagege a zo savet, n'eus ket pell, a-enep raktres mantras JOSPM evit pezh a sell ouzhi kelennadurezh ar yezhoù, hag ur bern tud odes sinet a youl vat ur sinadeg evit ma ne vefe ket diskaret kelennadurezh ar brezhoneg e Breizh met ivez ar Yezh ha tro-war-dro (betek-hen e vez kelennet hor yezh en eizh lise, e div skol-veur hag e kalz kevredadoù).

Digoret e oa bet ar stand d'an 12 a viz C'hwevrer gant an Aotrou Pierre Le Treut, Is-Prezidant ar C'huzul Rannvro e-karg ar sevenadur ha Prezidant Skol-Uhel ar Vro, ambrouget gant an Aotrou Bernard Le Nail, Rener Skol-Uhel ar Vro. Gweladennet eo het ivez ar stand gant an Aotrou Joël Cuzon du Rest, Prezidant a-enor ar "Club de Bretagne", an Aotrou Pierre Laurent, het roet dezhañ ivez zo kolier an Erming, Jean-Simon Mahé, Prezidant "Kevredad Bretoned Paris", Lena Louarn eus Skol an Emsav, Anna-Vari Chapalain eus Burev Europa ar Yezhoù Minorelaet...

EXPOLANGUES a zo ivez ul lec'h deus ar c'hevredad evit kaout darempredoù gant a bep seurt tud hag evit deskiñ a bep seurt traoù. Evel just e teuer amañ da welout al lodenn vrasañ deus ar pezh a vez graet

evit deskiñ pe peureskiñ an holl yezhoù a implij etrebroadel evel ar saoneg, ar galleg yezh-estren, an alamaneg, ar c'hastilhaneg, met ivez an italianeg, ar ruseg, ar portugaleg, an arabeg, an norvegeg, an hebraeg, ar japaneg. Anaf eo, brasañ lodenn ar wela-dennieren a hij dezho en em ditouriñ kement war ar yezhoù etrebroadel ha war ar yezhoù nebetoc'h implijet.

Nag a blijadur evidomp-ni Bretoned o welout e rae berzh e stand Bro-Japan ul lojistel a zoare evit deskiñ lenn japaneg, "NIPPONFILE" (ya, vat, het krouet gant ar stal MAGIDESCOTM (ya, vat, deskomp) eus Bulad-Pestivien e tal-kichen Kallag. Al lojistel-se hep e bar evit ar poent a vez kinniget gant Kanbrikenverzh Kemper (e-lec'h m'emañ o labourat brudetañ brezhoneger japanat ar vro, Makoto Nogishi, pezh na souezho den ebet...)

Standoù bras ha kalz a vrud-follennoù diwar-benn o yezh a oa gant Katalonia (ar Generalitat), Euskadi ar c'heisteiz ha Galisia (Xunta de Galicia). Enez Korsika, ha Rannvro Lengadeg-Roselló a oa ar arakadennoù divezhañ graet gant ar c'hoarieg, an okitaneg, ar c'hatalaneg. Evel just eo tu er standoù-se da skoulmañ darempredoù frouezhus gant tud e-karg dedennet bras gant kudennoù boutin d'ar yezhoù bilhan pe rannvoel, met o labourat an holl e-traoù all.

Dedennus e oa komz gant Kekekiz e stand ar C'hahada ha chom a rae sebet ar dud dirak o aberezh. Tu a oa deskiñ kalz e-berz amzer diwar-benn an Indianeg hag o gouzudi dezhañ en ur pejañ gant un Algonkin deus ar C'hahada.

Tu a oa ivez da zastum kalz titouroù diwar-benn ar vro amez Yugoslavia n'eus ket pell ha kompren ar vro. Kentelius-kenañ e oa tremen ur penadig-amzer e standoù Israel, Koweit, Malta, Meksik.

Dreist-holl e veze santet ul laouendigezh vras a zeu sur e-walc'h deus un dra anat ha n'eo ket bet komprenet e'hoazh gant ar jakined (na gant re a Vretoned siwazh) : pinvidik ha drev eo al liester, enoñs ha melkonio eus un anvander.



Frañsez Kervella

D'an 10 a viz C'hwevrer 1992 ez eo aet da anaon unan eus hor brasañ lenneg brezhonek : Frañsez Kervella.

Evit ar rummad yaouank Frañsez Kervella zo dreist-holl oberoù "Yezhadur bras ar Brezhoneg", ma kavont ennañ un harp dizionario evit komz ha skrivat ur yezh reañ.

Kalz a skridoù all a chom war e lec'h avat. Lod zo deuet er-maez e stumm levrioù hag a c'heller kavout da brenañ. Re all, niverus-kenañ a zo strevet e kelaouennoù evel Al Liamm, Hor Yezh pe Skol. Un dra vat e vefe o adembann e stumm levrioù evel m'eo bet graet c'hoazh evit oberoerien all eus rummad Gwalarn.

Liesseurt-kenañ eo oberoenn Frañsez Kervella. Hag en douarnour ar vicher, en deus skrivet barzhoniezh dindan an anv Kenan Kongar, studiadennoù ha notennoù niverus diwar-benn ar yezh, un hentenn nevez evit deskiñ brezhoneg het adembannet gant Ouest-France, e-trovennoù, studiadennoù diwar-benn ar sevenadur publik, al lec'h-anvadurezh...

Ne oa ket Frañsez Kervella eus ar re a vez dibaoez o klemmichat war marv da zont, a-hervez ar brezhoneg, "Ober" e oa e c'her-stur. Ur Breizhad en e sav eo bet. Un den en e sav, daoust da bep tra.

LEVRENNADUREZH

- "Krennlavarioù" Skol, 1955.
- "Evezhiadennoù war c'heriadur Roparz Hemon" Skol, 1962-1963.
- "Diazezoù ar sevel gwerzhioù" Al Liamm, 1965.
- "Hent nevez d'ar brezhoneg" Hor Yezh, 1981.
- "An den etre an anken hag an Ankou" Hor Yezh, 1981.
- "Barzhonegoù" Al Liamm, 1982.
- "Dindan gowriz ar bed" Hor Yezh, 1985.
- "An Ti e traoñ ar c'hoad" Hor Yezh, 1990.

Frañsez Kervella da vare Gwalarn



BERR-HA-BERR

rediet aozerien Gouel ar Filmoù hag ar Pallwel kelhek da cheñch deziraedoù ar gouel hag a vo adkaset d'an 28 a viz Mezhven betek an eil a viz Gouere. Titour : David Hedley Williams, aozer, Burev ar Gouel / S'wyddfa' / Wyl, Plas Dinefwr, Llandelfo, Dyfed Cymru/Kembre, pg. 0558 823843.

> Ar c'hevredad ARIA (enklask ha neveziiñ an skolioù-vezh) a aoz, dindan renerezh skiantel Guy Caro, e Sant-Brieg, etre an 3 hag ar 6 a viz Ebrel, ur gelaouenn anvet "Rencontre intentionnelle - Le cinéma du boire - Boire à l'Est, boire US". Titour : 3,5, stradaed Quinquaine, 22000 Sant-Brieg, pg. 96 61 08 93.

> Ar film "Les Gardiens du feu", produet gant 1-1 Production ha skoazellet gant SUGV, a vo e-skeud en nevez-amzerenn. An donevell-tre eus buhez pemdezhek evezhieren tourlan ar Wroc'h Vras a vo skignet gant FR3 er rannvro hag er Frañs e-bezh moarvat.

"Les Gardiens du feu" a vo kinniget ivez e Breiz hag e Douarnenez, e-pad an hañv, e gouel Europa ar mor, met da gentañ tout en euz euz evit digoridigezh Mirdi an Tourioù-tan hag ar balizemoù.

> Ar c'hevredad "Cinéma des Bretons" en deus kelennoù gant "Técnic" evit embann un enklask "Enquête Audiovisuelle et Régions" - L'investissement des Conseils Régionaux et des DRAC en faveur de l'audiovisuel - Labour kaset da benn gant Michel Dupuy gant un digoradur skrivet gant René Vautier da urzhiañ digant "Cinéma des Bretons, 4, stradaed Itron Moreau, 29300 Kemperle, pg. 98 39 02 80.

GLAD AR MOR

> Ministrerezh ar Sevenadur, Broioù al Liger, département al Liger-Atlantel, kêr Naoned ha Kenor Gall an istor morel a deus aozet ur c'hendiviz etrebroadel gouzlet da c'hoad ar mor hag ar skolioù. "Etablire 92". Eus an 23 d'ar 26 a viz Ebrel, tro-dro da 50 a berzhidi, a zo gortozet e Palaz Kerdic'hioù Naoned evit studioñ, dirak etre 350 ha 500 den, stad gworet ar glad. Titour : DRAC Broioù al Liger, pg. 40 14 23 52.

DAREMPREDOU ETREKELTEK

> D'ar 16 ha 17 a viz Mae e zeu, e vo aozet gant kumun Plouzeneal un emgav hag ur gouel tro-dro d'an danvez-mañ : "Rannvroioù ha broioù Europa". Ur plas a bouez a vo roet d'ar broioù keltek. Titour : Hervé Fall, Rener Ti an Tiegezh, bourk, 29260 Plouzennel, pg. 98 83 61 87.

- > 2-4, kendiviz : "Ginguené hag ar vuhez kefredel er Frañs war-dro 1800", SVBU-Roazhon.
- > Betek an 10, en abati Daoulas "Egipt da vare ar faraoned". Div zodenn a zo kinniget : saverien Karnak hag ar vuhez pemdeziek. (Titour : pg. 98 25 84 39).
- > 8-12, stand "Sonerezhioù ha dañsoù Breizh" gant Kevredad Rannvro evit Kenurzhiañ Diorroadur ar Sonerezh hag ar C'horollezhez (ARCoDAM) er saloñs Musi-corama e Pariz.
- > 11-12, emvod-studi diwar-benn ar gallaoueg, e Liger-Atlantel.
- > 20, Bodadeg ar C'hoarioù hengounel e Karaez.
- > 20-25, Kendalc'h Etrekeltiek e Douglas (Enez-Vanav), danvez : ar sonerezh. (Titour : L. Chapel, straed H. Berlioz, 29600 Plourin-Montroulez).
- > 23-28, e Palez Kendalc'hioù Naoned "Aber 92", kendalc'h etrebroadel gouestlet da c'hland ar mor hag ar stêrioù.
- > 25 ha 26, 5vet "Nevez-amzer ar C'hevredadoù" e Kemper.


- > 1añ, 20vet deiz-ha-bloaz Diaouled ar Menez ha Diffusion Breizh e Spezed.
- > 5-7, kendiviz : "War roudoù Kolombo..." SVBU-Roazhon.
- > 8, abadenn-veur "Kan ar Bobl" en Oriant.
- > 7-9, 4^e prantad gouelioù "En Arwen" e Klegereg.
- > 8-10, 3^e Gouelioù al Levrioù Troioù-kaer ha Beajoù "Étonnants voyageurs" e Sant-Maloù.
- > 16-17, gouvel rannvroioù ha broioù Europa e Plouzenil.
- > 27-31, 4^e "Emgavioù ar glier-nell bobl" e Berrien ha Groñvel.

KARNED

> Roet eo bet medalenn Marc'heg ar Strollad a enor d'an Ao. Roger Dupuy gant an Ao. Louis Le Pensec, Ministr an DOM-TOM, d'ar 7 a viz C'hwevrer 1992. Kelenner war an Istor er Skol-Veur, arbennigour war an Dispac'h gall, ezel eus kevrenn an Istor e S.U.a.V. ha Kadoriad ar Poellgor evit eil kantved an Dispac'h e Breizh eo Roger Dupuy.

> Degemeret evel Doktor el Lizhiri, gant ar meneg enorus-kenañ evit e dezenn "Le modèle agricole breton" eo bet an Ao. Corentin Canevet hag eñ kelenner war an douaroniezh e Skol-Veur Breizh-Uhel - Roazhon II, ezel kevrenn an Douaroniezh e S.U.a.V. hag oberour ur studiadenn deuet er-maez nevez zo diwar-benn al labour-douar hag ar greanterezh stag outañ e Breizh abaoe 1945.

Kejet em eus ouzh ur gevrenn eürus zoken...



Goude ur pennad termerezh en deroù, kevrenn ar Relijion, didalvoud eo spisaat n'eus abostolerezh ebet en he labour, he deus buan kemeret he lañs da vat, kement-se a drugarez da labour Michel Lagrée hag en deus asantet ren anezhi e-pad c'hwec'h vloaz.

Kavout a ra da izili ar gevrenn, gant evelez, ez eo bet kaset da benn ar gefridi o doa en em roet : bezañ ur gevrenn dedennet gant Breizh en he fezh, a zifenn raktresoù a bep seurt, gouest da reiñ an tu d'hec'h izili da zeskiñ traoù ha da lakaat an niver brasañ a dud d'ober o mad eus he enklaskoù dezhi.

Ar gevrenn he deus kinniget d'ar C'H/K.S.L., levrioù, evel-just, met ivez diskouezadegoù pe produadoù klewelet. E giz-se eo, e kemeras perzh Skol-Uhel ar Vro en diskouezadeg vras aozet gant ar c'hevredad Buhez, "Ar Vretoned ha Doue" a reas he "Zro Breizh" (8 kêr darempredet) e-doug pevar bloaz, gweladennet gant 150 000 den a-raok echuiñ he zroiad e Pariz, e Mirdi Arzoù hag Henvoazioù ar bobl, kinniget a-hont e-pad daou viz, ar pezh a c'hoarvez ral a wech.

Kantren dre Vreizh a-bezh, sed aze ivez politike-rezh ar gevrenn. Divizet he deus bodañ hec'h izili en ur zerc'hel kont eus ur c'hempouez etre an holl broioù e-lec'h mont ur wech da Roazhon hag ur wech er proviñs.

An doare stuz sevenadurel-se, mui an disentez d'en em vodañ div wech ar bloaz a zispleg ervat aked an izili da zont d'an emvodoù.

Koulskoude, ma teu tost an holl izili, ez eo da gentañ dre ma vez dedenus hon emvodoù e-keñver sevenadur. Aozer an devezhiad labour a ginnig ur weladenn goude ur beurevezh gouestlet d'ar c'hudennoù boas ha d'ur gaozeadennig gant un ezel, diwar-benn un danvez bennak dibabet gentañ. Ar weladenn, hec'h-unan, a vez heuliet gant ur brezegennig all.

Al labourioù-se a zo bet dastumet e-barzh al levr "Bretagne et Religion", Michel Lagrée o vezañ ar mestr-oberour avat. Moarvat e vije bet tevoc'h al levr hep an amzer hir gouestlet da brederiañ war ar penngerioù diwar-benn ar relijion da zibab evit raktres Holloueziadur Breizh. N'eo ket bet amzer kollet, avat, dre m'eo bet ar mare-se an hini ma labouras an holl an donañ hag ar muiañ asambles, ha dre m'eo bet kreñvaet kenstagusted izili ar gevrenn.

Ur gevrenn ne c'houlenn nemet brasaat hag a zegemer ingal izili nevez. Ur bodad tud a studi aketus ar goulennoù emezelañ gant ar youl da zegemer hepken izili prest da genlabourat da vat. Ma z'eus eta ganeoc'h ar c'hoant da gemer perzh e daou emvod ar bloaz, ar c'hoant da weladenniñ lec'hiennoù relijiel Breizh gant un ambrouger barrek, ar galon da selaou un nebeud prezegennoù a-raok lakaat ho kenizili da selaou ac'hanoc'h, ar re-se a vo plijet bras ouzh ho tegemer en o zouez. Kenavo ar c'hentañ ?

Bloaz zo ec'h embanne Skol-Uhel ar Vro al levr, frouezh labourioù unan eus he c'hevrennoù, an titl anezhañ : "Bretagne et Religion". Sed aze daou c'her liammet start en hor bro ha diazezerien Skol-Uhel ar Vro n'o doa ket kredet tremen hep sevel ur bodad e bal plediñ gant arvezioù relijiel buhez Bretoned dec'h hag hiziv.

**Levraoueg ar Skol-Uhel
La bibliothèque de l'Institut**

- ◆ Vers un aménagement de l'Acadie du Nouveau-Brunswick. Actes du Symposium de Moncton, 3,4 et 5 mai 1990. / publiés par Catherine Phippouneau. Centre de Recherche en linguistique appliquée. Université de Moncton, 240 p. 2e trim. 1991.
- ◆ Entre créole et breton : ces racines qui nous libèrent ! / Dominique AUPAIS - Ere, 140 p., 4e trim. 1991.
- ◆ Les campagnes de Duguay-Trouin / Nicolas et Marie-Jeanne OZANNE. L'Ancre de Marine. Non paginé. Planches - Reprint. 1990.
- ◆ Quand les champs avaient un nom : le Léon rural, 1920-1950 : Marcel TANGUY. Éd. Nature et Bretagne, 3e trim. 1991.
- ◆ Rétro-sillons, scènes rurales de Haute-Bretagne. Rue des Scribes, 127 p., 4e trim. 1991.
- ◆ Actes du colloque : l'école bilingue - 4ème rencontres nationales. Douarnenez / Flarep-aperb.
- ◆ Plomelin, au pays de Quimper/Sous la direction de Jean-Pierre Royant. UBAPAR éditions, 236 p., 1991.
- ◆ Le Droit à la parole / Noël LAINÉ. Terre de brume, 209 p., 1er trim. 1992.
- ◆ Étude sur les différents jeux et danses traditionnels de Bretagne, leur utilisation possible dans l'enseignement primaire / Gaïdig PODEUR, 70 p., sept. 1991. Mémoire de Maîtrise ayant obtenu le soutien de l'Institut.
- ◆ Yann-Vari Perrot - Istor ur pezh-veur / Strollad ar Vro-Bagan Embannadurioù Al Lanv, 206 p., 1991.
- ◆ Ar 1 000 ger kentañ e Brezhoneg / Gant an Emsav, 65 p., 1991.
- ◆ Mont da Israel / Yves MIOSSÉC. Gant Nevez, 195 p., 4e trim. 1991.
- ◆ Renabl Anioù Lehoù Inizi Kuzul Genedel Leon / Mikael MADEG. Emgleo Breiz - Ar Skol Vretoned, 1992.
- ◆ Mab-kaer ar Roue / Yvon KROC - An Here. Rummad Skol al Louarn **: 9. 77 p., C'hwevrer 1992.
- ◆ Bag ar Frankiz / Jules VERNE - An Here. Rummad Skol al Louarn **: 11. 154 p., C'hwevrer 1992.
- ◆ Paotr e skourjez ler / Erwan AR MOAL - An Here. Rummad Skol al Louarn **: 7. 78 p., C'hwevrer 1992.
- ◆ Gwraç'h he ribod / Cloidna CUSSEN - An Here. Rummad Skol al Louarn **: 8. 73 p., C'hwevrer 1992.

Emvodoù / Réunion

- ◆ Géographie/Douaroniezh. 28/3/92 - Brest
- ◆ Musique & Danse/Sonerezh ha Korollerezh 28/3/92 da 10 e. Oaled Abherve - Saint-Brieuc/Sant-Brieg.
- ◆ Préhistoire & Archéologie/Ragistor & Hendraouriezh 4/4/92 da 10e. Musée/Mirdi - Saint-Brieuc/Sant-Brieg.
- ◆ Histoire/Istor 4/4/92 da 9e 30. Rendez-vous à la nouvelle mairie/Emgav en ti-kêr nevez - Saint-Méen-Le-Grand/Sant-Meven-Porc'hoed.
- ◆ Littérature écrite/Lennegezh dre Skrid 4/4/92 da 10e 30. Centre culturel de la Providence (salle 4)/Kreizenn sevenadurel ar Providañs (sal 4) - Loudéac/Loudieg.
- ◆ Religion/Relijion 4/4/92 da 10e. Résidence des Pères montfortais/ Bod Tadoù Moñforzh - Pontchâteau/Pont-ar-C'hastell.
- ◆ Ethnologie/Tudoniezh 4/4/92 da 10e. Musée/Mirdi - Saint-Brieuc/Sant-Brieg.
- ◆ Culture et Patrimoine économique, scientifique et technique/Sevenadur ha glad armerzel, skiantel ha teknikel 8/4/92 da 10e - Mûr de Bretagne/Mur.
- ◆ Art & Architecture/Arzh & Savouriezh 11/4/92, 10e betek 17e. Mairie/ti-kêr - Tréguier/Landreger.
- ◆ Littérature orale/Lennegezh dre gomz 11/4/92 da 14e. Dastum Bro Dreger - Lannion/Lannuon.
- ◆ Protection de la Nature & de l'Environnement/ Gwarez an Natur & an Endro 11/4/92, 10e betek 16e. Centre des Arts et de la Culture/Ti an Arzoù hag ar Sevenadur - Concarneau/Konkerne.
- ◆ Relations interceltiques/Darempredoù etrekeltiek 25/4/92 da 10e. Restaurant Robic, 2, rue Jean Jaures/Ostaleri Robic, 2, straed Jean Jaures - Pontivy/Pondivi.
- ◆ Langues & linguistique/Yezhoù & Yezhoniezh 25/4/92 da 10e 30. Centre/Kreizenn Rocher Martin- Saint-Brieuc/Sant-Brieg.
- ◆ Conseil Scientifique et d'Animation/Kuzul Skiantel ha Luskañ 23/5/92 - Le Relecq-Kerhuon/Ar Releg-Kerhuon.

Actualités Culturelles de Bretagne

N° 2 mars 1992 • Gratuit •

ACTUALITÉS CULTURELLES DE BRETAGNE / KELEIER SEVENADUREL AR VRO

Périodique bimestriel édité par l'Institut Culturel de Bretagne / Skol Uhel ar Vro

13, rue de Belfort, B.P. 66A, 35031 Rennes cedex, Tél. : 99 38 98 88 Fax : 99 38 50 32

Président : Pierre Le Treut, Président du Conseil scientifique et d'animation : Per Denez, Directeur de la publication : Bernard Le Nail, Secrétaire de rédaction : Philippe Lanoë. ISSN : 0985 1062. Abonnement : 80 F par an (6 numéros). Tirage : 1000 exemplaires

Revue éditée par l'Institut Culturel de Bretagne

BREVES

FESTIVALS

> Le 3^e Festival International du Livre d'Aventure et de Voyage "Étonnants voyageurs" se déroulera du 8 au 10 mai prochains à Saint-Malo. Il sera cette année sous le signe de la Découverte de l'Amérique : les Caraïbes en seront le thème majeur.

Renseignements : Secrétariat général, 4bis, rue de la Motte Picquet, 35000 Rennes, Tél. 99 65 55 53.

> Les 25 et 26 avril 92 se déroulera le 5^e "Printemps des Associations" à Quimper.

Renseignements : Maison des Associations de Quimper, impasse de l'Odet, 29000 Quimper, tél. 98 90 39 51.

VOYAGES

> Dans le cadre de sa recherche pour une meilleure connaissance du monde celtique, le Cercle Celtique de Rennes organise, dans le cadre des manifestations de son 60^e anniversaire, du 17 au 26 avril 92, un voyage en IRLANDE, ouvert à tous.

Au programme : traversée Roscoff-Cork, Killarney, péninsule de Dingle, le Kerry, Glengarriff, Limerick, Galway, le Connemara, rencontre avec des groupes irlandais, soirées pub... Prix : 4050 F (+ adhésion au Cercle) pour 10 jours.


Renseignements : tél. 99 63 26 69 ou écrire : Cercle Celtique, J.P. Vincent, 28, rue des Gantelles, 35700 RENNES.

> L'association Bretagne-Irlande organise un voyage de quinze jours en Irlande au printemps. Le départ se fera de Roscoff le vendredi 15 mai (arrivée à Cork le 16 vers 13h.), retour de Cork le samedi 30 mai (arrivée à Roscoff le 31 vers 7h30).

Les inscriptions sont à adresser, au plus tôt, à Bretagne-Irlande - Polig Monjarret, Lann-Longroez, 56270 Plæmeur, tél. 97 86 33 73.

Le gouren et les jeux traditionnels

INTERVIEW DE GUY JAOUEN



Scène de lutte dans l'ouest de la Grande-Bretagne en 1903. Extrait de : "A pictorial history of Wrestling"

Guy Jaouen, 37 ans, technicien EDF et lutteur. Marié, deux enfants, il consacre son temps libre à sa passion. Il est secrétaire aux relations internationales de la Fédération de Gouren et secrétaire de la Fédération Internationale des Luittes Celtiques. Membre de l'ICB dès les premières années, il est également secrétaire de la section Sports et Jeux.

-Guy Jaouen, voici revenir l'époque à laquelle se pratiquent les jeux traditionnels et la lutte bretonne dans de très nombreuses fêtes...

